

CHANSON NEVEZ

1.

Apollon tad eloquant me a invoq da bouar,
Discoël da lagat brillant ha sel ous ma glac'har;
Rac ar sujet deus eur sôh a meus c'hoant da rimâ
Mes compos dei eun ton, ne allanquet cana.

2.

Troublet eze ma oll sans, ma speret chagrinet,
Tristet e he ma c'halon, ma memoar tourmantet,
Deus a sonjou eur fleuren a so quen caer ha quen pur,
Goechal pa sonjen enni me a moa plijadur.

3.

Pemp bloa ameus tremenet, pemp bloa on deus collet,
Aboe deus a hanon bars em c'halon blesset,
Me meus caët ar re-se berroc'h vit pemzec de,
Aboe e zon o languissan ho sonjal nos a de.

4.

Penos Venus traïtourez, ma lezes Cupidou
Da hoarzin, da folatrin en jardin ma c'halon;
Ha te o voelet an daërou continuellamant
O tont deus ma daoulagad hep caët cessamant,

5.

Soëzet oc'h auditoet, me gred ezoc'h soëzet,
Pa ne meusquet ar sujet aman dizoloet,
Me laro dec'h ar gruellan demeus an oll boanniou
E separi diou galon, difreza ho veniou.

6.

Ret eo breman separi diou galon unisset,
Pa na bermet an natur eveint-hi assamblat,
C'houi tud yaouanq, tud fidel, hac oc'h eus amitie,
Juget hac en so er bed brassoc'h captivite.

7.

Me a so prisonnier a rest deus ma bue
Ha quentoc'h vit mervel, so disquennet em be;
Ma mestrezie a so ive couls a me captives
Separet on diouti, allas! evit james.



Pichounet ha c'hoñi coulmet, laenedigon Venus,
 Turzunellet consolant a gri quen hirvoudus.
 Po clewan o hirvoudin e sempla ma c'halon
 Ebars e creis ma yaouanqis pebes punition.

Me as ped eoaic bian, te a teus diou esquel,
 Cas evidon eur liser d'am mestrezic fidel,
 So diciet gant an Amour dre huanadennou,
 Ma defo sonch a hanon betec fin e deiou.

Lar dei rei dit ma c'halon so ganti eulermet,
 En eur plaç delicios gant an amourouset;
 Be diganti eur liser quent retorn voar da c'his,
 A vo scrivet em faveur gant an dorn am languis.

Nin so n'em separel gant cals deus a regret
 Ha c'hoas n'em requetomp ep gallout en laret,
 Dre ma sellou languissant entre ma he goelio,
 Ep gallout enem ampech, me ho car, a lerin....

Oh! pebeus chanchamanchou a gavan bars em stad,
 Ar c'housquet, tranquillamant a serre ma lagad;
 Me a leze ma c'halon da garet ma mestres
 Na brema n'on quet capabl da dont de c'hancoués.

Arsa ta guerset yaouanq, hoas quent vit finissan,
 Na lezet quet ho calon da garet evel ma ran;
 Credet ahanou guerset pa ver o separin,
 E teu eur galon tener da garet mui ous mui.

Bremá me a vew tranquil ebars em captivite,
 Me a lès an dud yaouanq da reded nos a de,
 Me a ve o repos a neuze o sanjal
 En g'enet ma mestrezic p'e goelin guechal.

F. LECAVALIER.

E ty Ar Goffic, e Lannou.

MARI BEG A ROG HA FRI PARTOUT

Var ton : *Son an dançou.*

Mar oc'h eus c'hoant, va mignonel, d'a anveout eur vreg rog,
Me o kunduo, pa guerfet, dirag Mari beg a rog,
Bemde var dra eun heur anter e cluc'h var treujou e dor,
Kerkent teodon pig ar c'bartier gant eur skaoun pe eur gador
A ziced oll en e c'hever; an audianç so digor,

Var barlen Mari e veler eur pes fouldren assied,
Var bini e cont pep kommer kement e deus inventet;
Klevet a rêr pet den lipous a ya bemde d'ar c'hafe,
Pet plac'h e deus tri amourous, ha pet a zo stad enne:
Pet ozac'h a zo mewier, ha pet a bil o grague.

Mari beg a rog a gommand var ar c'honseil divragou,
Eb kaout an nebeuta damant e tigor franck e guenou,
Pa ne deveus var e bizach na moustachou na haro
E red dêi kaout an avantaj-da zikrial tud ar vro,
Guévier, sôloui, kos langach, flud a bep kalite zo.

Mari beg a rog so titret vel an huella noblanç,
Dommaj e n'en d'é ket pried d'eun den pinvidik a Franç;
I é princes an diegi, comtes al liboudennou;
I é dukes al loustoni, marquises ar strakellou;
Gouarneres ar jolori, baronez ar pillou,

Kerkent a ma ve imbannet dadu den yaouank da zimi,
E ve, d'al lun vintio, galvet e c'honseil bras gant Mari;
Pep konseiller en gueleden a boagu gant e vouton bêr,

Evit klask ar guellan moyen da derri prout an affer.
Ar plac'h a gar ar jigoden , pe ar goas a ve mévier.

Ar re voassa da zikrial an dud a ya en fortun ,
A zo , evit an ordinal , merc'hed chommet eb nikun ;
Merc'hed kes chommet da goza eb tapout eun tamik goas,
Hac a gommanç bréma facha, dre ma ne deu den d'ho choas,
Couskoude an hini gossa n'é ket tri-uguent vloa c'hoas.

Kerkent ha ma vel eun eured o tont varzu an Ilis ,
Mari beg a rog a zired en manchou lous e hinvis ;
Evel eur vioc'h ho vreskin e c'haloup abiou ar ru ;
Holà ! Catel, Jeannet, Perrin, Soas, Mac'harid, deut dious-tu.
Cetu aman eured Martin , deut da dremen ar rêvu.

Va c'hommer sellit eus hounes , dislivet e davancher
E c'horneten zo eb ampes , hac e gueleden re vêt ;
Ho ! sellit-ta eus an den-man , pegen striz é e vragou.
E dog so brassoc'h evitan ; ha kals re hir e voutou ,
Eur chimizeten so gantan var a rochet en pillon !

Pa ve eur vreg kes gouilloudet , divars e bugen kental ,
E c'houlén Mari estenet ; petra , nao mis so dija ?
Me gave din voa an eured d'al lun goude pardon Pôl ,
Ha pask n'é ket c'hoas erruet ; allon ! grêd o deus an tol
Eb n'o devez va c'hemennet , an dra ze a gavan drol.

Pa gleô kloc'h Ilis ar barrous o c'hervel d'eur vadiant
Mari gant eun troad eb botes , a erru arog ar chant ;
Mæs, dre valheur n'eus ket ezom demeus eur voues ken raouliet
Da zikour kana *Te Deum* evit an nêve garet.
Gant e c'hommerezet e chom e kichen dor ar vêtet.